



Trahison an Amourouset

Pe ar Foss Promesse

VAR TON : **Ar Serjant-Major....**

Migoonet g'irion Breis-Izel, g'it eun arêl d'am c'hlovel,
Ispicial c'hui tud tener, deud da cœla em rek d,
Rag allas abœ mon ganet, ec'h euillan ar goell blanedo,
Mes marteze e vin p'abêt, gant eon Doue eternal.

Breman me a Jspiko dec'h, o ia bars en ber gômzon,
An antretien famillier, ag ar foss promesseou,

A zo passet dre va c'halon, breman zo neudeut omzer,
Mes lec'h caout konsolation, me n'em boa met disesper,

Me am boa choaset eur vestres, eus paros Ploudaniel,
Man biskoas nemet onnes, ne deus charmet va buez,
Ar c'haëra plac'h oa er baros, gantan oll oa admiret,
Koant evel eun el deus an env, me zonge oa diskennet.

Kenta gœc'h e moa y gœlet, oa en pardon ar Folgoat,
Mes me pa moa y remerket, va c'halon dride gant arjoa.
O sonjeal peguen kaër eoa, e guenet ag e feçon,
Me alias eus e remerki, a reas reflexion.

Mes ne moa ket hardiegues, an abafder am dalhe
Na ouien en pesort feçon, gallout monet ebete,
Mes neuse me a moa sonjet dont d'en em hardiseat,
A me o vonet beteg enui, enni goulen va menat.

Me eo em adressas deezi, bo'jour dec'hoi plac'h yaouanc
C'hui a zo deut dar pardon, gant eur galon gontant,
Merket e var o pisag, oc'h douç tener a galon,
Larit din a me alfe beza, eur veach o koir vignon.

Elleal emezi den yaouanc, birviken ne sonjean,
Vefec'h deut a geit all, da glasc merc'het yaouanc,
Rag ebars en o pro dec'hui, zo traoualc'h a verc'het,
Ne ket possubl a guement all, vefe me pe choaset.

Allas va guir voia karet, guir eo pez a lercet,
Rag nemedoc'h vefe kontant, vidou n'eus netra c'hret,
Mes mar galfen pligeout dec'h, en eur feçon benag,
Me a ve eun den evrus, kent mont deus ar bed-man,

Ha possubl ve den yaouanc, pe kement agarantez,
Evit eur plac'h yaouanc, pini ne anveit ket,
Mes barit din an enor, da zont kement d'am c'haret,
Me ivez deuyo du karet, tre ma vin var ar bed.

Possubl ve plac'h yaouanc, teufac'h c'hui d'am c'haret,
Me eo an evruss, zo gant Doue krouet,
Mes eun tam douetanç a m'eus, o va muia karet,
Mar teuit d'am zialissa, me varvo gant regret.

Oh l'emezi den yaouanc, ne devit ket da gredi,
A pa ve tout ar goell deodou, euep dec'h o parlant din,
Me gemero dre eur scouarn, ag a losko dre e beo,
Kredit entre-mat vin en buez, no trahissin biken.

Neuze va mestres ker mo to dec'h vit promesse,
Eur oalen en aour massif, kemerit y diganen,
A var oalen se e touan, gant se a gant karantez,
Ne garin plac'h yaouanc nemedoc'h tre ma vin en bue.

Ho trugatecat a ran, emezi den yaouanc,
Cetu me breman, rentet va c'halon kontant,
Pa velan ar garantez, e peut c'hui evidou,
Va c'harantez evidoc'h, zo ker bras va mignon.

Oh, bebeus joa va mestres, cetu n'y om daou kontant
Pon eus formet eur chaden crevoc'h vit dir n'ag ouarn,
Pon eus formet en amitie, gant eur galon barfet,
Me gred entre ma vimp en bue, biken na vo foret.

Arça eta va mignon ker, me gemer all liberte,
Da lavaret dec'h donet, beteg ar ger gamep-me,
Evit gallout koseal, un neubeut var or stadou,
Ag ivez renta parfetoc'h evrustet or c'halonou.

O, ia va guir voia karet pa sit din an enor,
Ne o kunduo gant joa, va mestres beteg o tor,
Rag kredi a ran parfet, e goirion o komzou,
Ne rofet james scouarn vouzar, da zelaou goell deodou,

Cetu me va mignon, en em replet er ger,
Au nos a avanç allas, ce m'eump mui a amzer,
Me a lavar dec'h kenavo, en deyou da zonet,
Mes deut prest d'am goelet, me vo fidel bepret.

Neuze eta va mestres ker, me lavar dec'h kenavo,
Ag a devi abenn un nebeut, d'o kuelel rag mall a ma,
Vui gant a c'hui a vo chomet, fidel do promesseou,
Ma na yec'h ket deut da zelaou, va mestres ar goell deodou.

Breman en em separont, an diou garantez barfet,
Ep soujeal er velenni, aljent marizez kavet,
Rag var o hent lec'h ma, valeont ne velont nemet roudou
Bijou spern a drein pikant poset gant ar goell deodou.

Me a ia c'hoas eur yec'h, beteg t'y va mestres,
Vui gout ag i vo chomet, fidel de promesse,
Rag mall e meus da velet, fleuren ar yaouankisou,
A gement zo krouet er bed, bars en oll jardinou.

Debonjour a joa va mestres, cetu me deut do kuelel,
Lavarit din breman penos ra ho yec'h et

Rag eur peunat so dija, boe m'omp en em velet,
Lavarit din ta va mestres, ag o yec'h et zo parfet.

Oh, ia emezi den yaouanc, a drogaredoue,
Va yec'h et a zo parfet, o'ag oc'h ini zo ivez,
Me gavo hir an amzer, pa'o kuelen va mignon
Mes pa oc'h deut dam-guelet, e joas c'halon.

Lavarit din ta va mestres, a c'hui pefe liberte,
Dazont assambles ganen, beteg ker Landerne,
Ag eno pa vemp eruet, c'hemp dar stal gaer,
Da choas dec'h va mestres, eur mouchover ar brava.

O, ia emezi den yaouanc, gant kais a gontantamant,
Da veza o servicheres, me meus ean dezir ardant
Ag a gemero diganec'h, eur mouchover en presant,
Pa rit din kement an ennor d'am c'harout fidelamant.

O, remercia mad a rau, emezi den yaouanc,
Deus an objet a offert din ag a roit diñ a presant,
Mes lavarit din a c'hui deufe, d'em c'houdui dar guer,
Va onan ne gredan ket mont, ag all loar ne vo ket sklér.

O, ia va muia karet, me ielo do cundui,
Abeteg ma vefoc'h rentei; va mestres en o ty,
Rag entre ma ven'ganec'h, an amzer ve ber evidon,
A pa o'ho cuelan ket-eve trist va c'halon.

Cetu me va servicher, eru en kichen ar ger,
O trugarecat a ran eus o madeles em c'hever,
Mes petra e an deo zo zo eru entrezeg ennomp,
Va c'halon dija em c'hreisa grën oll gant ar spout.
Allas leme an den-man, cetu me un den collet,
Goude lo peza karet, o ya dreist an oll verc'het,
Mes goelet a ran breman, patantamant a sklér,
Pecos o zoon-me trahisset eus o cundui dar ger.

Petra emezan den yaouanc, petra peul da glasc
C'hui a deo deus a get all, da gundui merc'het yaouanc,
Mes bremaic me a baëo dec'hui o kamejou,
Dont da zistrobada tud yaouanc, eus a gichen o zrejou.

Holla emezan den yaouanc, mo peul en em distromplet,
Me ell lizo da vont ganec'h, mar gae ia peul choaset.
Ma ell dont ker brao do tapout, evel ma deus va zapet.
Me gred na vefoc'h ket evrus oc'h enill ar seur merc'het.

Arça eme an den yaouanc, pa eret en dispartii,
Roit dia va mouchouer, a va goalen en anour massif,
Pa e guir e moa int roit dec'h evel guir promesse,
Mes c'hui dre eur galon drañtour, e peul bet va zrahisset.

Holla emezi den yaouanc, mar goc'h bet ker sotse,
Ne ket mezo bet kos dec'h kreditardis en ze,
A pa e meus o recevet, cërten me oo reutin ket,
A mar goc'h sot mo tisodo, rag se eta partiet.

O na'bebeus displigeadur, o na'bebeus planeden,
A meus me o va Doue, war ar ped-man da zouten,
Goelet pegement ar arc'hant a meus dispignoet ganti
Ag evit va recomanç digaç re all d'am goall breti.

Cetu aze evit guir, trahison an amourouset,
Mes ket gant ar goell d'edou, a gant ar foss promesse,
Rag pa zontit beza karet alies vesit trahisset,
Mes me vo furoc'h en amzer da zout a ve gatin dea eb-t.

Barnedigues ar Mevier

DIRAG

TRIBUNAL DOUE

Var ton : **SANT PER**

Kristenien a Vreis-Izel, tostaat daglevet,
Ar varnedigues spontus, a zo bet prononcet,
Allas a enep eun den, collet gant ar boisson,
A zo bet apparisset, da renta pis e gont.
Gerc'hes glorius vari soit din oc'h assistanc
A sklerigen dam memor evit gallout avanç
Da ziskleria kement-man en toez an eferien
Vit ma kemerfont anei evite eun exempl.

Breman e zit da glevet ebars en guirione
Ar varnedigues rust so en tribunal Doue
Douguet enep ar Mevier ac an oll eferien
Ma na deuont da cheug buez a da zerhel ofen.

Da guenta e teu Doue gant eul leor bras estranch
Ag en eun dorn ar poeziou ag ivez ar valanç
Evit servig da jury e teu ar verc'hes a Sant Per
An testou cenap dean zo an oll Brevent.

DOUE TA GONZ

Sell en em gav man dar chools man deus an de
A belec'h eo eman na deus a be kontre
Parfumi ra dioutan eur c'hoez zo effroyabl.
Beza en devezo boisson ar paour kës mizerabl.

AN ERVENT EN KUR VOEZ

Piou or mest mad eal ennes an autrou tor e be
Neoa pligeador nemerou kichen ar veren
A pa n'eur gave er guerkarguet gautau e gaf
E dud er meas vije sklapet da basseal-an nos.

DOUE

An den man evit gvir e neveus foijou bras.
Mes c'hui peut c'hoant a velant da greki ane c'hoas
A ben ma rin e jageamant a rankia goret pis
Vertuyou mad an den-man kouls evel eal vis.

AN EREVENT

Grognit ar pezh a guerfoc'h ni m'eump er gonezet
Ganemp e teuyo breman da esa eur banne
Me agred en eus schet ar paour kès Mevier man
Hastit buan er rei demp ma zay da louka tau.

— DOUB

Oh, oh, frankil me Doue, ne hit ker buan
Red mad eze din goelet vertuyou an den-man
Rag an den man neus soufret kouls ende vel en nos
Ag e blaç kenta a zo ebars er barados.

AN EREVENT

Allas, or mest emeze en em distromplet
Kals guelloc'h evit eman a zo breman daonet
Rag ma ne n'eus ket lazet n'eus bet c'hoant da ober
Ma nije kavet e du var an heur a goler.

— DOUB

Mes larit din ivez a ne he-ket dan ofiçou
Dar mintin a da nos ma na late ket e bedennou
No oa ket guelloc'h evitan pa vige divar an dour
Rei a re an gluzen gant largentez dar paour.

AN EREVENT

Allas, me vel breman penos oc'h faziet
Rag evit ar virionez assur ne lavarit ket
Penos alje an den-man opedi deus an nos
Abenn ma c'he da gousket e zoue oa e vallos.

— DOUB

C'hui a gose divalo crac ebars em fresans
A dar personachou a zo aman e rit offaç
Ag-ouspen me lavar dec'h ebars en eur guir ber
Abenn ma po an den-man rankfoc'h en diskuel skier.

AN EREVENT

Oh, evit an draze n'i ne reomp ket a gas
Rac ebars en ifern a zo c'hoas kals a blaç
Ag a bretant an den-za pa m'eump er gonezet
Petramant ne rit ket em andret lealdet.

— DOUB

Eo me rayo lealdet en andret peb hini
Mes pep den a renk ivez difen e barti
Mes an den-man n'eus ket meritet an ifern
Pa e bet ker-charitabl en andret ar bevien.

AN EREVENT

Ya n'i a oar manific e oa mad dar beorien
 Pa vije divar an dour e roe an alozen
 Mes allas pa vije men an den barbar ze
 E rebresel d'he vreg kouls vel d'he vugale.

Ag ouспен-ze ar Mevier n'eus kement vic a zo
 Pa vanko dean arc'hant da efa bannahou
 Debi kement goenneg en ty a gavo tout
 Andillat ar besselliou a basse dre e c'houzoug.

N'i a ranko er c'haout pa m'eump er gonezet
 An ifern a vo e bartaj pa n'eus er meritet
 Rag dre e oal exemplou kouls en nos vel en de
 E n'eus bet tennet varnan ar goler a zoue.

DOUE

Me a oar parfetamant n'eus va injuriet
 En nos kouls vel en de e n'eus va blasfemet
 Mes velkent e dipitus dean mont dan ifern
 Goude e œuvrou mad da leski kig ag eskern.

Ha te va mignon, Sant Per petra a leveie
 Var ar varnedigues demeus ar Mevier kès
 Pe e gondaon den ifern pe rei dean e c'hraç
 Me oar pa oa var ar bed e oa eur pec'her bras.

SANT PER

Va mest mad eme Sant Per, red e ze dec'h ober,
 Kealdet da bep hini ag ebars en pep affer
 Ma roit dezan e c'hraç o pezo keus goude
 Rag a re all eveltan c'hoantayo kaout ivez.

DOUE

A e'hui Guerc'hes glorius va mam muia karet
 Livirit din ag en gle beza pardonet
 Rag e gondaon dan ifern a zo poanius dezan
 Goude e œuvrou mad lavarit din breman.

AR VERC'HEs

Gout mad a ran e poanius dezan mont dan ifern
 Goude e chariteou en andret ar beorien
 Mes kassit anezan eur pennet var an dour
 Erit m'en em gon vertisso ar paout kès Mevier man.

DOUE

E bien va mignon ker, rei n ran did ar c'hrag
Da vont var an douar da veve eun neubeut c'hoas
Evit ma chenci buez a m'en em gontvertissi
Evit goude da vare dont aman dam meli.

AR MEVIER

Oh, Doue trugarezus, ho trugar-kat a ran
Deus ar vadeles a peut evidon-me breman
Me ia da vont dan douar pa peut komandet dia
Ag a rayo pinigen er c'heit a ma vevin.

AR MEVIER DIFUNET

Autrou Doue, ma Doue, en pelc'h e m'on-me
Me zonge din voan maro cetu me enbuez
Me meus goelet en nos man an oll varnerien
A zo en Tribunal Doue a enep aneserien.

Rag se eta c'hristenien komprenit en dramad
Rag n'en d'ho ket fablennoù ar virionez a larao.
En em gontvertissit entrezoc'h eferien
Evidon-me a bromet e talc'hin mad va fenn.

An ini e neus rimet ar reit a nevez
Var a varn'hedigues a gred e guirione
Guillaume Merer a Jean-Marie an Taoc o-ano
A zouet dec'h ar barados goude eur ar maro.

TAOC.

FIN

(PROPRIETE)